

414

An diou C'hoar .

(267)

Var un ton gallec .

Diou blac'h yaouanq a hanavezân . me ,
 Descadurez ha natur vad zo en he ;
 Lida a rêr demeus ar verc'h hena ,
 Hac Izabel demeus an eil , pe Bella .

Bella zo coant , bras ha fêsonet mat ,
 Nê ket kercouls Lida , se a zo anat ;
 Ha gouskoude , pa zellân piz out - hi ,
 Ne gavân dremm ken douç evel he hini .

Cals a speret e deus ive Bella ,
 Ha gout a voar manifik ha implija ;
 Ma , m'en assur , Lida , gant nebeutoc'h ,
 Eun dra benak e deus hac a zo gwelloc'h .

Pa ve piñfet Bella , zo stat en - hi ,
 Abalamour d'he c'hened , d'he c'hoantiri ;
 Da verza klink Lida tenn ne vrage ,
 Ar c'hontrol eo , modestoc'h c'hoaz e verzo .

(268)

An aluzen a ra Bella hep mar ;
 Ma , ne deus fors , meur a hini a lavar :
 Bella , pa zo , a blich calz nebeutoc'h
 Eguet Lida pa reuz un dra d'e - hoc'h .

Bella , gwir eo , a zikour ar re glân ,
 An oll er goar , ha facil bras er c'hredân :
 O bizita a ra e kreiz an de ,
 Ha diourz an nôs eza Lida d'ho bete .

War gement - mâ , m'am be c'hoant da gonta ,

Un heur antex e padfen, d'ay nebeuta;
Rak-se, gant-hi, evit mont buhannoc'h,
Ne livirin nemet ur guerik deoc'h.

(269) Ur quèzes cös a gollas e mab ker,
D'ar re nec'het soulajamant a ranker:
Anc'hant d'ar vam ay diou c'hoar a gassar;
Lida, ouspenn, ganti dourec a voelas.

Derzo ho diou mar fell de-oc'h plijout,
Cetu pens e zeo possubl he dizout:
Hillikit mad e c'halon da Bella,
Hac e peoc'h list he hini da Lida.

Na pequer koant, eo Bella gouskoude!
Selllet out-hi hep soueza piau a Chelfe?
Ha te, Lida, Lida, pequer mad out,
Eur memes int: ta wuelet ha ta garout!

Alph.
De Lansalut

(Vol. IV, p. 267-269.)
10 str. numérotées.